

Canouen dud yaouanc.

Carout a ran ma mestres
 iä dreis bob ini
 Balamour man deus guenet
 furnes a coantiri
 na dindan ar firmament
 ne caven quiet e var
 et daou lagad zo brillant
 evel an eol pa par.

deus e gueno ne zorti
 nemet comzo prudent
 comzo caer a meuloni (1)
 bopret un air content
 na pa ven en e vresañ
 e ve joaus va halon
 hélas me zo en Treguer
 ag i zo en Leon

Casset meus dei Liser
 evouit e hassuri
 ma man ma horf en Treguer
 ma halon zo ganti
 ma spreret(2) d'eus effrezañ
 na couitafe jamais
 ma na ve fidel dime
 e vo zur Treitoures

Divoa(3) ma e Gouillis
 e voa er vadalen
 Dam dost da Vontroules (4)
 bed e voa o pourmen
 me a brometas dei
 feis a fidelite
 et teujen propet (5) de haret
 Petec fin ma bue

na me a contas dei
 comzo caer en faveur
 ma ne chang a sentiment
 me mo sur ar bonheur

da lavaret e meo
Goneet amitie
Perlezen ar joauste
Brahoa plach a valle.

écriture inconnue ; c'est la même que celle du f. 79 r. et v.

Dun otro deus plistin.

(1) Ms. : meuloni ; lire : meulodi

(2) Ms. spreret ; lire : speret.

(3) Ms : divoa ; lire : divea.

(4) Ms. : Vrontroules, ; lire : Vontroules.

(5) Ms. : propet ; lire : popret : bepred.